




PARDON SANT ERWAN

(Chapel Treminou)

Meulgann da Sant erwan

1. Piou ar zant nevez
Nijet da Vro Doue
© Iadan Birvith
Gant silakadeg daouarn?
Hennez eo Erwan
Degemeret eno
Gant e geneiled.

8N2-3-085

Treminou

Ilomenn

2. Hennez eo Erwan ,divrall en e gredenn,
heros ar reizhded,gantan pep santelez,
embanner pep gwir,spont pep fallagriez,
e lein an Nenvou.
3. Gant flamm e galon, war-dro an engroueziou,
o reih e vadou,e gorf hag e spered,
setu da viken,en envor a viro
pep paour anezhan.

Salver Jezuz,bet digaset war an douar
Evit or silvidigez : Aotrou Doue,ho pet truez!

R/ Aotrou Doue,ho ped truez!

C'hwi a zo deut etr bed-man evit gelver
Ar beherien : Aotrou Krist,ho ped truez!

R/ Aotrou Krist,ho ped truez!

C'hwi hag a zo breman e gloar an Tad,evit tenna
Warnom e vadelez : Aotrou Doue,ho ped truez!

R/ Aotrou Doue,ho ped truez!



AR GLORIA

Gloar da Zoue e lein an neñv
Ha peoh d'an dud war an douar.

- | | |
|--|---|
| 1. Bezit meulet, Aotrou Doue
Mil bennoz deoh ha trugare,
A-dreuz ar bed ni 'gan ho kloar
Ho kalloud hag ho sked dispar. | 3. Meuleudi deoh, Salver Jezuz,
Gwir Vab d'an Tad karantezuz,
Oanig Doue, treh d'ar pehed,
Ho pet truez ouzom bepred. |
| 2. Ni hoh ador, Doue an Tad,
Roue an neñv, Doue oll-vad.
Ken braz eo bet ho karantez,
M'ho peus kaset ho Mab er bed. | 4. Klevit pedenn ho tud fidel,
Roue ar bed, savet d'an neñv;
Da viken gant ar Spered glan,
On Doue beo, e gloc ar Tad. |

RA VO KRENV OR FEIZ

- Ra vo krenv or feiz,
Ra vo beo or karantez,
Mia skedo dreizom karantez Doue.
- | | | |
|--|---|--|
| 1. D'an dud a vez gwasket e rent o gwir;
D'ar re o-deus naon e ro bara,
D'ar re a zo er jadennoù e ro frankiz. | 2. An Aotrou eo a ro sklérjenn d'an dud dall;
An Aotrou a laka soun ar re a zo krommet;
An Aotrou a gar-an dud fidel d'al lezenn. | 3. An Aotrou 'zo difennour an dud estren,
Skoazeller an emzivad hag an intañvez,
Derhel a ra d'e bromesaou da viken. |
|--|---|--|

Alleluia

Meulit oll an Aotrou Doue ! (bis) Ha kanit e vadelez ! (bis)

Karantez vraz an Aotrou a bado da virviken !

Alleluia ! alleluia ! Alleluia ! alleluia !

Ra vo meulet gant tud an douar, e c'hloar - Ra vezo embannet

Ra youc'ho laouen ar bed a bez !

Arok an Aviel

An Aotrou Doue ganeoc'h - ha gand ho spered !

Pennad euz Aviel ... Gloar d'eoc'h hwi Aotrou Krist !

Goude an Aviel

Meuleudi da Jezuz Krist en e Aviel Santel !

AR GRED

NI 'GRED EN EUN DOUE HEBKEN

- | | |
|---|---|
| 1. Ni 'gred en eun Doue hebken,
Bet a-viskoaz, 'zo da viken;
En Tad galloudeg-oll incurbed,
A grouas euz netra ar bed. | 3. Ni 'gred start er Spered Santel
A gendañ atao e skoazell;
E sklérjenn a splann er bed,
Harp d'or buhez a ro bepred. |
| 2. Ni 'gred er Mab, Salver ar bed
D'ar maro vidom bet lakët;
D'an trede deiz savet da veo
E gloar an neñv 'sked vid atao | 4. Ni 'gred en eun Iiz Santel,
A zo-unan hag oll-vedel;
E savim eun deiz a varo
Vid ar vuhez a bad atao. |



EVIT AR BEDEN SUL :

Selaouit, Aotrou , ar beden a zav euz or c'halon !

KEMERIT VA DOUE

- | | |
|--|--|
| 1. Kemerit, va Doue
Lodenn euz ar bara
Evid ma teuio da veza
Korv Or Zalver, e gwirionez. | 2. Kemerit c'hoaz ar gwin,
Frouez ho madelez.
Hen chenchit 'ta e gwad divin.
Vid ma vo or silvidigez. |
|--|--|

AR BEDENN-VEUR

- An Aotrou Doue ganeoc'h.
Ha gand ho spered.
- Ho kalon d'an uhel.
Troet eo warn Doue.
- Lavarom bennoz da Zoue on Aotrou.
Just ha santel eo.

Setu amañ mistic ar feiz:

Ni 'zom gand feiz, Salver Jezuz,
En ho maro ken presiu.
Meuleudi deoh, savet da veo !
Ni ho kortoz da zond en-dro.

AR PREFAS

SANTEL

Santel, Santel, Santel an Aotrou Doue, Mestr ar bed.
Lein eo gand ho kloar an neñv hag an douar.
Hozann e barr an neñvou.
Benniget an hui a zeu en ano Doue.
Hozanna e barr an neñvou.



A zo dreizañ, ha gantañ, hag emañ,
deoh-c'hwil, doue an tad oll-halloudeg,
a-unan gand ar Spered glan,
Peb gloar ha peb enor,
a oll-riskoaz da virviken. Amen.

LID AR GOMUNION

Kenteliet gand gourhemenn Or Zalver,
da desket ma 'z om bet gantañ da bedi,
e kredom lavaret :

On Tad hag a zo en neñv,
Hoh ano bezet santelleet,
Ho Rouantelez deuet deom,
Ho polontez bezet gret
War an douar evel en neñv.
Roit deom hirio or bara penderieg;
Pardonit deom or pehejou,
Evel ma pardonom d'ar re o deus market ouzom;
Ha n'on lezit ket da gouez en tentadur,
Med on diwallit diouz an droug.

Deoh ar Rouantelez, Aotrou Doue,
Deoh peb galloud, ha peb gloar da virviken.

Peoh or Zalver ra vo bepred ganeoc'h.
Ha gand ho spered.



Oan Doue, a ziam pched ar bed.
 ho pet traez ouzom!
 Oan Doue, a ziam pched ar bed.
 ho pet traez ouzom!
 Oan Doue, a ziam pched ar bed.
 roit deom ar peon!

Jezuz a oll viskoaz

Ref.: O kalon Zakr Jezuz, mammenn ar gwir vuhe
 Entañt va halon gand tan ho karante.

1. Jezuz, a oll viskoaz ennom ho peus sonjet
 Jezuz, a oll viskoaz, c'hui ho peus va haret

2. Petra ho touge c'hui da rei din ar vuhez?
 Petra ho touge c'hui, nemed ho karantez?

5. Petra fell deoh c'hoaz en eur zével d'an nenv?
 Digor ar baradoz d'ho pobl a garante.

6. Koulz ha war ar halvar, hokalon, va Zalver
 Evidon-me bemdez a verv war an aoter.

7. O Jezuz, pa zeo gwir n'oh nemed karante
 Perag e choman yen, perag n'ho karan-me?

Kantig Sant Erwan

Ref.: Nan eus ket en Breiz, nan eus ket unan,
 Nan eus ket eur sant evel Sant Erwan.

5. Mar fell deoc'h an tu da gaout ho mennad,
 2 w. pedit Sant Erwan, ha pedit ervat.

1. Neus ket en Argoad, na mui en Arvor
 Koulz ha ha Sant Erwan, vit an dud a vor.

6. Gant tud a bep stad, uhel hag izel,
 E peder Erwan, a dost ha hag a bell.

2. Nan eus ket er vor, der-holl a lârer,
 hag a ve ken mat, vit al labourer.

7. Vit an holl e oa leun a garantez,
 Evel gwir vreudeur o degemere.

3. Neus ket kaerc'h skouer d'an dud a lezenn,
 eget Sant Erwan, skouer ar veleien.

8. C'hwi 'oa alvokad pa oac'h er bed-man,
 Bet hon alvokad en nenvoù breman.

4. Ha d'ar beorien gaezh, ha d'an dud a boan,
 nan eus ket gwelloc'h eget Sant Erwan.

9. Pedomp Brezhoned, pedomp Sant Erwan,
 Basoc'h sant 'vitan nan eus ket unan.

Da feiz on tadou koz, ni pôtre Breiz-Izel, ni 'zalho mad ato

Vit feiz on tadou koz hag en-dro d'he baniel, ni oll en-em stardo

Feiz karet on tadou, morse ni n'ho naho; Kentoh ni a varvo. Kentoh ni a varvo.

D'an den diwar ar mêz, kenkoulz ha d'an den a vor

C'hwi a ro nerz-kalon, da stourm boan ato;

Gouzout a reont, en nenv e kavint oll dor zigor,

ar vuhez, vo bet tenn, d'an drubuilh, Kenavo.